

Tro ar brezhoneg er c'hlas

Anv ar skolaer.ez :	Anv ar stummer.ez :	Deiziad/eur :
Skol/kêr	Klas/niver a skolidi :	Gweladenn niverenn ...
Abadenn diwar-benn :		

Ur sell war brezhoneg ar skolidi

- Brezhoneg dre gomz**

- ☐ E surentez emañ ar skolidi gant ar yezh(où) : n'o deus ket aon d'ober fazioù dre gomz.
- ☐ Ober a ra ar skolidi gant an div yezh dre gomz.
- ☐ Kavet ez eus bet doareoù da lakaat ar skolidi da lavarout ar frazennoù boutin : lidoù, skritelloù...
- ☐ Kavet ez eus bet doareoù da lakaat ar skolidi da grouiñ frazennoù nevez.
- ☐ Kavet ez eus bet doareoù da lakaat ar skolidi da gomz kenetreze.
- ☐ Raktresoù brezhonek dre gomz a dro gant ar skolidi.
- ☐ Ostilhoù zo gant ar skolidi evit lakaat anezhe da gompren ar pezh o deus desket / a chom da labourat e brezhoneg (fichennoù skoazell, priziadennoù, gourizoù...).

Ezhommoù ar skolaer.ez:

Kuzulioù ar stummer.ez:

Dafar / dielloù:

- Brezhoneg dre skrid**

- ☐ Labourat a ra bemdez ar skolidi war al lenn e brezhoneg.
- ☐ Ober a ra ar skolidi gant an div yezh dre skrid.
- ☐ Skrivañ a ra bemdez ar skolidi e brezhoneg (penaos ?).
- ☐ Labourat a ra ar skolidi war dielfennañ an div yezh (yezhadur, displegadur, reizhskrivadur, geriaoueg).
- ☐ Ostilhoù zo evit sikour ar skolidi da gompren ar pezh o deus desket / a chom da labourat e brezhoneg (fichennoù skoazell, priziadennoù, gourizoù...).

Ezhommoù ar skolaer.ez :

Kuzulioù ar stummer.ez :

Dafar / dielloù :

- Brezhoneg emren** (e liamm gant al lieslive)

Strategiezhioù (atalieroù, ostilhoù niverel...) a dro gant ar skolidi da lakaat anezhe da vezañ emren : ☐ E brezhoneg dre gomz. / ☐ E brezhoneg dre skrid.

Ezhommoù ar skolaer.ez :

Kuzulioù ar stummer.ez :

Dafar / dielloù :

Ur sell war brezhoneg ar skolaer.ez

- **Brezhoneg ar skolaer.ez**

- ☐ Kavet ez eus bet strategiezhioù evit komz brezhoneg d'ar skolidi hep treiñ.
- ☐ Kavet ez eus bet ur c'hempouez etre an div yezh.
- ☐ Anavezet eo an ostilhoù hag ar mammennoù evit kelenn brezhoneg hag e brezhoneg (TES, Pearltrees, Tribu, abadennoù radio, webtele ...)
- ☐ Kavet zo bet dafar hag a glot gant ezhommoù pep live (dielloù, levrioù, hentennoù...)
- ☐ Kavet zo bet dafar hag a glot gant al lieslive evit lakaat ar skolidi da vezañ emren e brezhoneg.
- ☐ Tro en/he deus ar skolaer.ez da gejañ gant brezhonegerien all evit derc'hel pe wellaat e/he live yezh (er skol, gant ar stummer.ez : abadennoù pedagogel, devezh staj brezhoneg,...)

Ezhommoù ar skolaer.ez :

Kuzulioù ar stummer.ez :

Dafar / dielloù :

Ur sell war ar sevenadur hag al liammoù

- **Sevenadur**

- ☐ Liammoù zo etre ar yezh ha sevenadur Breizh (dañs, kan, arzoù-kaer, sonerezh, istor...)
- ☐ Liammoù zo gant tud ar vro (arzourien, brezhonegerien, buhezourien, skolioù ha lec'hioù all...)
- ☐ Raktresoù sevenadurel a dro gant ar skolidi.

Ezhommoù ar skolaer.ez :

Kuzulioù ar stummer.ez :

Dafar / dielloù :

- **Liamm gant ar familhoù**

- ☐ Kavet ez eus bet doareoù da gehentiñ gant ar familhoù diwar-benn an divyezhegezh er c'hlas (pere ?).
- ☐ Raktresoù zo evit krouiñ liammoù yezhel ha sevenadurel gant ar familhoù.

- **Liamm gant ar c'hlasoù all**

- ☐ Kenlabouret e vez gant ar c'hlasoù all er skol (eskemmoù servij...).
- ☐ Raktresoù sevenadurel ha/pe yezhel zo gant ar c'hlasoù all er skol.
- ☐ Labouret e vez gant klasoù an hentenn (skol-vamm / kentañ derez / skolaj ...).
- ☐ Raktresoù zo gant klasoù an hentenn (skol-vamm / kentañ derez / skolaj ...).
- ☐ Plantet eo bet brezhoneg pe sevenadur Breizh er raktres skol.

Ezhommoù ar skolaer.ez :

Kuzulioù ar stummer.ez :

Dafar / dielloù :

Ezhommoù all?